

ITROUN-VARIA KERDEVOT

Ton : *Laudate Mariam.*

I

Kanomp a vouez huel,
Mari, Mam Doue;
Ni oll e Breiz-Izel,
'Zo he bugale.

DISKAN :

Mam Doue, ô Guerc'hez, } *bis.*
Bezit hor c'harantez, }

II

Kaloun ar Vretounet,
Atao, a viskoas,
D'ho Mam muia karet,
'Zo bet digor bras! *Laudate.*

III

Gant mein dantelezet,
Ho deuz hon tadou,
D'ar Verc'hez benniget,
Savet ilisou! *Laudate.*

IV

Hogen 'n ilis kaera,
Euz a vro Gerne,
D'ann Itroun-Varia,
A zo enn Ergue! *Laudate.*

V

Kerdevot eo hanvet,
Chapel burzudus,
Enhi e ve kavet,
Grasou mam Jesus! *Laudate.*

VI

Var lez ar prajeier,
Karget a vleuniou,
He sao huel ha kaër,
A ziouc'h ar c'hleuniou! *Laudate.*

VII

Ha dirag ar chapel,
 He sao eur c'hoat bras,
 Hag er feunteun santel,
 He red dour a c'hras ! Laudate.

VIII

Kerdevot benniget,
 Lec'h c'houek d'ar pec'her,
 A bell amzer choazet,
 Gant Mam hor Zalver. Laudate.

IX

Eno he teu bemde,
 Ha gant fisians bras,
 Da bedi Mam Doue,
 Tud ann Ergue-Vras ! Laudate.

X

O Mam drugaresuz,
 Na kaera grasou,
 Oc'h euz digant Jesus,
 Bet d'hon eneou ! Laudate.

XI

It di da zaoulina,
 Paour ha pinvidik,
 D'ann Itroun-Varia,
 It tud reuseudik ! Laudate.

XII

It holl, gant levenez,
 Den fur... pen diank,
 Da bedi ar Verc'hez,
 It koz ha yaouank ! Laudate.

XIII

It tad, mam ha bugel,
 It tud ann Arvor,
 Divrec'h hor Mam santel,
 Deoc'h holl zo digor ! Laudate.

XIV

Piou c'helfe lavaret,
 Niver ar grasou,
 Dre ar Verc'hez skuillet,
 Var hon eneoù ! **Laudate.**

XV

Kaout a ra d'ar pec'her,
 Distro var Doue,
 Ha dirag he varner,
 Truez d'he ene ! **Laudate.**

XVI

D'an dall 'ro ar gullet,
 Nerz d'an digaloun,
 D'ar bouzar ar c'hlevet,
 Ann env d'an anaoun ! **Laudate.**

XVII

Soudardet Breiz-Izel,
 Ken tom enn emgann,
 A Ha c'houlen he skoazel,
 Pa vent kreis an tan ! **Laudate.**

XVIII

Klevit ar martolod,
 Pa dreuz ar mor doun,
 O itroun Kerdevot,
 Pedit evid-oun ! **Laudate.**

XIX

Kemper ha Sant-Yvi,
 Ha kals paressiou,
 A deu di da bedi,
 Pa ve 'r pardonniou ! **Laudate.**

XX

Elliant, Tourc'h ha Briec,
 A deu aliez,
 Gant tud Sant-Evarzec,
 Da di ar Verc'hez ! **Laudate.**

XXI

Allas ! nag a boaniou,
 'Goez varnomp bepred,
 Blonset eo kalonou,
 Kals a dud er bed ! Laudate.

XXII

Nag a dristidigez,
 Ran-galoun, auken,
 Er bed-ma aliez,
 A ve lod an den ! Laudate.

XXIII

Hor c'horf a ve flastret,
 Gant ar c'hlenvejou,
 Ha gant an drouk speret,
 Taget hon eneou ! Laudate.

XXIV

Va chalon 'zo skuizet,
 Gant poaniou 'r bed-ma,
 Mont d'an Env d'ho kuelelet,
 A garje brema ! Laudate.

XXV

Euruz en ho kichen,
 Ni 'velo Jesus,
 Ni 'gano da viken,
 Mam drugarezuz !

Mam Doue, o Guerc'hez, } bis.
 C'hui 'zo hor c'harantez ! }

J. SALAUN.

IMPRIMATUR :

24 Juin 1881.

DU MARHALLACH.

Librairie J. SALAUN et C^{ie}, à Quimper.